



ENKLASK 7-12 VLOAZ

LEVRIG-C'HOARIOÙ



BARZAZ BREIZ

KAN BREIZH



MIRDI
BREIZHEK
AN DEPARTAMANT



Barzaz Breiz

KAN BREIZH

Degemer mat er Mirdi breizhek !

Barzaz Breiz zo ul levr ma oa bet bodet kalz a ganaouennoù gant Teodor Hersart Kervarker 200 vloaz zo !

Mont a rae Teodor a gêriadenn da gêriadenn, selaou a rae an dud o kanañ ha goude-se e skrive ar pozioù hag an notennoù sonerezh en e garnedoù : un dastumer e oa.

En diskouezadeg-mañ e kinniger an temoù a gaver er c'hanennoù-se : mojennoù Breizh, istor Breizh, buhez pemdeziek an annezidi. Emaout o vont da welet oberennoù (taolennoù, kizelladurioù, tresadennoù...), da selaou Teodor ha dreist-holl kanennoù *Barzaz Breiz*.

Kae d'an eil estaj evit kregiñ gant c'hoarioù da levrig.
Un nebeud reolennoù a ranker doujañ dezho er mirdi :

Met:



- arabat eo mont re dost d'an oberennoù
- arabat touchañ an oberennoù
- arabat diskouez un dra bennak gant da greion

Gallout a rez:



- c'hoari, sellet, hunvreal, pourmen, distreiñ, dont en-dro
- sevel goulennnoù
- chom hep gweladenniñ pep tra

Kavout a ri ar respontoù d'ar goulennnoù a zo al levrig-c'hoari e dibenn an diskouezadeg.

REN AN ENKLASK

**E-KREIZ
BARZAZ BREIZ !**

Me zo Gwenc'hlan ma anv, barzh on ! Er vuhez e plij din kanañ ha seniñ evit an dud. Gwiskañ a ran atav ma sae c'hlas, evel-se e vezan anavezet. E meur a ganenn eus *Barzaz Breiz* emañ !

Hiziv em eus ezhomm ac'hanout ! Unan bennak zo aet gantañ ar ganenn a blij din ar muiañ. Ha gallout a rez sikour ac'hanon da adkavout anezhi ha da zivinout piv eo al laer ?

An holl c'houlennnoù gant an dresadenn-mañ a roio merkoù dit evit diluziañ an enklask.



Ar bazenn gentañ evidomp eo adkavout Teodor, aozer Barzaz Breiz ! Ur wech ma'z po adkavet anezhañ, kae e-barzh ar sal a-dreñv dezhañ ha dastum ar merkoù evit adkavout ma c'hanenn !

MERK KENTAÑ

*E rez-an-douar emañ,
Me zo Gi Eder Belmaner ma anv
met graet e vez Fontanella ac'hanon ivez...
Kavout a ri an eil merk e-kichen ma c'hleze brudet !*

SAL 8

EIL ESTAJ : MOJENNOÙ BREIZH

Amañ e ri anaoudegezh gant mojennoù Breizh kanet e *Barzaz Breiz*. Istorioù int a vez kontet gant an dud an eil d'egile. Savet int diwar istorioù gwir pe tennet eus ar faltazi. Kalz a ganennoù eus *Barzaz Breiz* a vez kanet en deiz hiziv c'hoazh, kalz a arzourien a adkemer anezho hag a zispleg anezho en-dro : gant kanaouennoù, livadurioù, kizelladurioù...



1. Lug da dokarn ouzh ar bonn sonerezh a-dal da daolennoù BRAUNWALD diwar-benn Kêr-Iz ha selaou ar c'hanennoù (n'eo ket ret dit selaou anezho penn-da-benn).

Peseurt benveg a anavezet ?
Kelc'h ar respont mat.



Toumperezh



Piano



Telenn

Ha plijet eo dit selaou ar benveg-se ?
Kelc'h ar smiley a glot gant ar pezh az peus santet



2. Kav an daolenn-se gant Jules COIGNET ha sell mat ouzh an dalenn ziwedhañ (ar foñs), petra a welez ?
Kelc'h ar respont mat



Un eskob hag
ur peulvan



Un daol-vaen
hag un eskob



Ur manac'h hag
un daol-vaen



E pelec'h e c'hoarvez an darvoud-se ? Skriv da respont
amañ ha skriv an anvioù er bajenn 11 :

3. Mojenn Kêr Iz zo eilpennet !
N'emañ ket mui 5 tresadenn Jean BRAUNWALD en urzh.
Kav anezho er sal ha ro un niverenn dezho eus 1 da 5 en urzh vat.




4. Sell ouzh an holl oberennoù er sal ha liamm an tudennoù hag al lec'hioù ouzh ar vojenn vat.



Mojenn Kêr-Iz



Mojenn Arzhur



SAL 9

EIL ESTAJ : ISTOR BREIZH

Amañ e vez graet gwerzioù eus ar c'hanennoù. Anv zo eus kanennoù trist ha kalet alies, ma vez kaoz eus istor Breizh. Kavout a reer enno tudennoù kreñv ha kalonek o stourm evit ma teuo Breizh da vezañ ur vro dizalc'h diouzh Frañs



5. Kav stamp *Nevenoù, roue kentañ ar Vretoned*. Amañ e weler Nevenoù war e varc'h e-kreiz an emgann. Evit diskouez ez eo roue ar Vretoned ez eus bet treset meur a arouez eus Breizh war ar skeudenn. Kav anezho ha kelc'h anezho amañ dindan.



Erminigou



Kroaziou



Triskels



Ying-yang

6. Kav ha kelc'h amañ dindan ar skoedoù a weler en daolenn *Stourm an Tregont*.



H



U



A



R



T



O



S



Z



V



A



E



D



Z



E




D

Skriv pep lizherenn a welez dindan ar skoedoù az peuz kelc'hiet : _____ hag adskriv ar ger er bajenn 11.



7. Kav ar 7 kemm a zo etre an daolenn ez levrig hag an hini diskouezet er sal !



Unan eus ar 7 kemm a dalvezio dit da ziluziañ an enklask...

SAL 10

EIL ESTAJ : AR VUHEZ PEMDEZIEK EN 19^{VE}T KANTVED

Gant *Barzaz Breiz* eo taolennet ar vuhez pemdeziek, e Breizh, 200 vloaz zo. Er c'hanennoù e vez komzet diwar-benn an dimeziñ, buhez ar beizanted, ar baourentez, ar c'hleñvedoù pe choazh gouel ar re varv.



8. Sikour Gwenc'hlan da adkavout e dog ! Evit an dra-se e rankez tremen dre an oberennoù a welez er sal-mañ nemetken.
DIWALL : arabat sevel da greion !



9. Lug da dokarn ouzh ar bonn sonerezh dirak an daolenn *Hent ar vourc'h*, *Penn-ar-Bed* gant Camille BERNIER ha selaou ar c'hanennoù (n'eo ket ret dit selaou anezho penn-da-benn). 2 goublad binvioù a c'hallez klevet, hag anavezout a rez anezho ?
Kelc'h ar respontoù mat

Binioù ha bombard



Toumperezh ha trompilh



Gitar ha toumperezh



Gitar ha piano



Violoñsel ha piano



Tric'horn ha taboulin



Ha plijet eo dit selaou ar benveg-se ?


Kelc'h ar smiley a glot gant ar pezh az peus santet :




10. Kav an daolenn *Mesaer Kerlaz*
Petra eo micher ar mesaer ? Petra a vez diwallet gantañ er prad ?

Skriv da respont amañ : _____

11. Met petra eo an ardivink-se a veze implijet 200 vloaz zo evit arat ar parkeier ? Gant sikour an oberennoù diskouezet er sal, skriv e anv amañ dindan. Ha goude-se el lec'h mat, liamm ar marc'h a zo o stlejañ ar benveg hag an den a zo o heñchañ anezhañ.



Skriv da respont amañ : _____



12. Piv on-me ?

Un den on.

Labourat a ran er parkeier.

Alies e vez un tog ganin war ma fenn hag ur vazh-kamm pe ur benveg etre ma daouarn.

on


EIL ESTAJ : AR VUHEZ PEMDEZIEK EN 19^{VE} KANTVED

An Ifern hag ar Baradoz zo daou dem a zo anv anezho e kanennoù *Barzaz Breiz*. Un dudenn brudet eo an Ankoù. Skeudenniñ a ra ar marv. E-pad an noz e vez o tastum eneoù ar baotred hag ar merc'hed en e garrigell hag o kas anezho da ved an Anaon.



13. Kav an *Ankoù Bokedet*.
Petra zo gantañ en e zorn ? Impli
ar gartell evit kavout e anv ha skriv
anezhañ amañ dindan :

Liamm ar pikoù amañ e-kichen evit
lakaat an dra da zont war wel.



14. Liamm stampoù (skeudennoù) disheñvel
Reun KRESTON diskouezet en holl salioù
ouzh an istor mat.



☐ Sakr Nevenoù



☐ An den e flac'hoù
Ar paour



☐ Mojenn Arzhur



☐ Mojenn Kêr-Iz



E *Barzaz Breiz* ez eo an holl dudennoù-se :
Loened Harozed Tasmantoù
Kelc'h ar respont mat ha skriv anezhañ er bajenn 11.



ENKLASK MERKOÙ DASTUMET



A-hed an diskouezadeg ez peus dastumet merkoù evit
gouzout pelec'h emañ kuzhet kanenn Gwenc'hlan.

Adskriv ar merkoù en destenn amañ dindan ha gouzout
a ri da belec'h mont.



N'emañ ket ar gerioù dre ret en urzh ma'z peus kavet
anezho el levrig . Kav anezho gant niverennoù ar
goulennoù hag ar pajennoù.



An istor kontet e kanenn Gwenc'hlan a choarvez :

E _____ (Goulenn 2 - pajenn 4)


E-kreiz stal-labour an _____ (Goulenn 6 - pajenn 6)

hag an _____ (Goulenn 14 - pajenn 10)

Serret eo en ur _____ (Goulenn 7 - pajenn 7)

Ne chom mui dit nemet kavout gant piv eo bet aet
ar ganenn-se ken prizius evit Gwenc'hlan...

DIDROC'H AN TUDENNOÙ HA SAV DA HAROZ PE DA HAROZEZ.



JANED - AR FLAMM

NEVENOÙ - TAD AR VRO